



kazetenn ar stourmoù e breizh

10 lur

# bremañ

GOUERE EOST 1983

Niv. 22



**BEC'H D'AR PANELLOU  
WAR VORD AN HENTOU**

Kenavoiz her,

Lennet m'eus war v-"Bremañ" al Lighiri hag ar penad-dou a-zivout ar radio-tele e brezhoneg. Ar pezh a ouezer hag a weler abaoe bloavezhioù a ziskouez sklaer n'he deus ar stad nemet dismegañs evit Breizh hag ar brezhoneg.

Petra ober neuze, pa welomp hor yezh o vont a-dammoù gant larv ur c'hultur all ? Soude bezañ esaet meur a zoare stoum e chom uran ha n'eo ket bet gwall bleustret betek-her : hini an disente-zezh lezennel peogwir ne zougjer ket d'hor gwirioù-broad.

Ret eo deomp nac'hañ paeañ darn eus ar tailhoù : en o zouez ar skodenn radio-tele en he fezh.

Gouzout a ran n'hell ket holl dud an emsav kemer perzh er stoum-se en abeg d'ho stad, d'ho familh, d'ho nebeud a arc'hant, ha gant ar aon a c'heller kaout eus heuliadoù ur seurt disentez.

Met poent eo, a gredan, ma fell deomp labourat en ur doare efedusoc'h, haletaat, stantaat hor stoum.

Karout a rañon gouzout pet den o deus nac'het paeañ ar tailhoù tele bete-vremañ.

Ret eo d'ar re a nac'h paeañ, en em vodañ evit bezañ kaeñvoc'h oc'h enebañ hag oc'h herzel ouzh ar gwaskerezh ha ne vanko ket da zont eus ar mererezh, abred pe ziweghat.

Skrivet m'eus abaoe denou ar bloaz da baotr ar tailhoù, da vererezh ar radio e Roazhon, ha d'ar "Ministère de la Communication" e Pariz, da lavarout dezho perak ne baeañ ket va skodenn.

Fiziasñ m'eus e vimp niverus o nac'hañ paeañ hag o talc'her mat betek penn, rak mont betek penn a zo un afer all.

Kenavo, ha gwellañ gour-c'hemennoù.

Ar re a nac'h paeañ o skodenn skingomz ha skinwel a c'hell skrivañ d'ar gazetenn, hag ivez d'hor c'hoamanter eus Sant Malo.

Loeiz Bihannic - 65, straed Riancourt- 35400 Sant Malo-



kartenn-bost gwerzhet gant SAE

Lennet m'eus penad Ouest-France diwar-benn tezerenn Maryon Mc Donald. Kavet ha deus ar saozeg-se en doare dreist d'ober bruderezh dezhi hec'han, en ur ober plijadur d'ar C'hallaoued, ha da Vreizhiz zo emichañs.

Skarzhañ a ra houmañ en un taol-pluenn pemp kantved a washerezh gall, ar pezh n'eo ket fall endeo ; ouzhpenn-se, e tamall d'ar emsaverien chaokañ gevier evit sachañ evezh warro ; peogwir ez eo ar vrezhonegerien, hervezi, o dije goulennet digant gouarnamant Bro-C'hall bezañ gallekaet-mik, evit bezañ tostoc'h ouzh ar eurvad hag ouzh ar frankiz, moarvat.

D'am soñj, n'hon eus ket ezhomm a Saozon a seurt-se, trawalc'h eo evel-se gant ar C'hallaoued ha Breizhiz zo. Ra chmo en gêr !

Paour-kaezh emsaverien ! Labour zo ganto c'hoazh...

Emile Granville.

# Miss Mc Donald a-enep d'ar gwaskerezh



## Espace francophone

Kenedil her,

Ma c'hoarvezh ganeoc'h e-noeñ a-wechoù d'ar meuzh d'ar noz ! emvod ebet ! an diouer anezhañ o tismant ha speredl, sellit ouzh "Espace francophone" war FR3 da 10 e. 30. Talvezout a ra ar boan. N'ouzon ket avat ma 'vez ski- gnet ingal an abadenn-se. Klaskit eta. Seurt abadenn a no heuz deoc'h da chom hep bezañ prenet c'hoazh ur ma-gnetoskop.

Evel a ouzoc'h, ar galleg a zo en arvar. Al lodenn vrasañ eus ar binvioù eskemm keleier, ar re nevesañ atav, a labour e saozneg, a skign e saozneg, a bourchas binvioù nevez all hag a gomz saozneg zoken (troidigezhioù skoret gant un uzhiatarez).

Poent bras eta bodañ an holl nezhioù galleger eus ar C'hebek d'ar Suis en ur dremmen dre Afrika hag all, evit stoum a-enep ar saozneg. Setu

aze danvez an abadenn. Diskouezet e veze zoken gant ar biz, ar genvroidi o doa lakaet un anv saozneg war o stal. Duius eta koulz ha kentelius.

Diskouez a rae un dra atav : n'omp ket c'hoazh er maez eus al lagenn na tost da da vezañ. Rak ma n'o deus ket ar c'hallegerien halz a grog war ar teknikoù nevez evel ar skinwel dre neud, ar telematik (m'o deus halz a zale e tlefer lavarout...), petra soñjal eus krog ar vrezhonegerien warro.

Dindan ar brezel sevenadurel eo ur brezel ekonomikel a vez renet splannoc'h-splan-nañ. Rak en ur wezhañ ar yezh e wezher ar benveg a gomz pe a gompren ar yezh. Hag amañ e Breizh ? Amañ, ez omp "out" !

Ma ! da c'hortoz ma teu-fe ar stroladoù broadelourien er maez eus o slogarioù toull (evel ar re m'eus klevet e "Ti Nominé") hag eus o huñvroù war ur Vreizh Di-eub hep Gallaoued (a lak a-c'hamon da walhuñvreal) a-benn pegoulz e savomp ur ski-pailh video 'banzh Skol An Emsav ?

Jil Killeverre.

D'an 22 a viz Even 1983 e c'halle lennerien O.F. kavout war ar bajenn "Breizh" ur penad hir a-walc'h diwar-benn enklaskoù ur "skiantourez" saoz, Miss Maryon Mc Donald, hag he c'havadennoù o deus talvezet dezhi, a-hervez, da bourchas un doktorerezh antropologiezh kevredigezh, mar plij, e Reddec'h (Oxford en ho saozneg pemdez).

Plijus, a dra sur, en deus kavet kazetenn O.F. tezennoù hon "skiantourez". N'en deus ket lennet he labour avat, na gortozet ken e vije bet embannet. Bastument en deus diganti e felle dezhi prouñ o devoa goulennet ar Vretoned bezañ gallekaet, ne oa bet morse gwasket o yezh, hag e oa bet ijinet ar gwaskerezh-se gant an Emsav. D'ar penad-se e klaskan respont.

Lizher da Viss Mc Donald Kinnig a rit evel un dra souezhus e vijet bet goulennet deskadurezh e galleg en 19-ve kantved. Netra nevez, a gav din : en holl bobloù kabestret ez eus bet graet heñvel (ha mat e ve hel larout, Miss !). Hag evit abegoù politikel hag ekonomikel, na dennont ket moarvat d'an antropologiezh, met komprenus a-walc'h memestra : emañ ar arc'hant hag ar galloud e kër gant ar gallegerien, p'emañ ar baourentez (pe washoc'h) war ar maez gant ar vrezhonegerien. Alc'hwes ar frankiz ? Ar skol. E galleg, eveljust : n'eus hini all ebet. Skolioù divyezhek ? Gwall nebeut a

dud en Emsav a soñj en traoù-se : prederiet int muoc'h gant o barzhonegoù hag o banveziou eget gant ar bobl. Ouzhpenn-se e kredont n'hall ket ar yezh mervel. Rak moarvat ne oa ket gwall efedus ar gallekaad er skolioù a-raok ar brezel 14.

Met kavet hoc'h eus, Miss, e oa bet nac'het an divyezhegezh gant ur C'huzul Deskadurezh e Bro-Gesper e 1831, hag e Brest e 1836. Ar bobl eta a c'houlenne galleg, emezit-hu. Met piv a oa er c'huzulioù-se ? Labourerien-douar, pe vourec'hizien c'hal-lekaet, n'asantent ket deskif brezhoneg d'o bugale, aon gante o c'hontammiñ, ha c'hoant gante mirout ar skol evito ? Hag hel larout a reoc'h dimp, Miss ? Ha goude, pa voe ar skol un dra ret d' an holl, ha roet e veze d'an dud da zibab ? Met kement-se a zisplegit moarvat en ho tezenn, Miss.

Rak n'eo ket a-walc'h komz eus fedoù : ret e ve gouzout o displegañ. Ha fedoù zo ne blijent ket deoc'h. Ar simbol : gant pebezh spered "skiantel" e larit ne oa nemet ur c'hoari bugale ! Ur c'hoari ! Gouest koulskoude da lakaat da ouelañ c'hoazh a hini kozh a lare din : "Ne gousken takenn da noz, a-wechoù, pa soñjen em bije da sevel an deiz war-lerc'h da vont d'ar skol adarre, ret din komz galleg pa n'hallen ket, ar simbol neuze, hag ur grabannad ouzhpenn, ret chom goude ar skol da labourat evit ar mestr, tapout taolioù

gantañ, erruout er gêr diwezhat, ur grabannad gant ma zad, ma labour d'ober war-lerc'h, koan ebet ma ne oa ket echu a-benn an eur... Ha poan da gousket..." Ur c'hoari evitañ, ya ! Hag an holl re a lavar hiziv : "Ret e oa ober an droug-se dimp, evit ober vad dimp." Peseurt c'hoari a gav d'ho speredskiantourez e oa ?

Ha neuze, gant ur Gall, pe ur Breizhad evel ma larit, Miss, e vije bet ijinet ar simbol, petra a vern ? A-viskoazh ez eus bet misionerien ha lakizien o servij Doue pe Roue gant ijig, fal-lagriegh, pe entan.

Bezit onest 'ta ! Gwall "skiantel" e kavet, Miss, larout en deus an Emsav Ijinet ar gwaskerezh-se ? Ha komzoù de Monzie hag e genseurted, zo bet ijinet ivez ? Ur skiant gwall iskis eo hoc'h antropologiezh !

Hervez a lennan emaoch o vont da studiañ al labourdouar e Breizh. Evit kont Kuzul Europa. Mat e vo dezho disfiziout diouzh hoc'h onestiez : daoust ha larout a reoc'h ivez e c'houlenn al labourerien-douar kuitaat o atantoù ? Met marteze n'hoc'h eus morse degemeret meizad ar gwaskerezh ekonomikel : ur menoz gwall estren d'hoc'h antropologiezh kevredigezhel, moarvat !

Mark Kerrain  
Darn a gred e vo brezhonekaet Bro-C'hall gant divvroerien Breizh-Izel.



Studio ar B.B.C. aloubet gant ar C'hembreiz d'ar mars-se oa 480 eurvezh saozneg, 18 eurvezh kembraeg...

# UN HANVEZHAD-STOURM GANEOC'H!

**D**'an 19 a viz Even eo bet dalc'het Dael Ispisial Skol An Emsav. Pouezus e vezo an Dael-se evit dazont hor yezh hep mar ebet. Burutelladennoù frouezhus o deus lakaet izili Skol An Emsav da vouezhiañ evit palioù resis.

Daou stourm zo bet lakaet da zanvesioù-trec'h eta :

## ● - SKINGOMZ-SKINWEL

Tremen poent eo e kreskfe lodenn ar brezhoneg war wagennoù ar radio hag en tele. Ha tu ez eus desevel hor bugale e brezhoneg ma vezont beuzet en ur mor gallek kerkent ha ma c'hoariont gant nozellennoù ur radio pe un tele ?

Dic'houzañvus eo mac'homerezh ar media. Skol An Emsav a ginnig deoc'h eta dont d'he sikour evit diframmañ ar buanañ ar gwellañ an traoù-mañ A C'HELL BEZAN GRAET DIOUZHTU :

- skinwel : - Un abadenn geleier 15 munud bemdez e brezhoneg.
- Un abadenn 30 munud ar sizhun evit ar vugale.
- Ur yalc'had da gas da benn programmoù BREIZH O VEVAN, hag ur film un eurvezh bep miz.

- skingomz : - 5 eurvezh  $\frac{1}{2}$  brezhoneg bemdez war R.B.O.
- Daougementiñ niver ar gazetennerien vrezhonek hag ar c'hazetennoù brezhonek war R.B.O.
- Skignañ abadennoù brezhonek R.B.O. war ar vro en he fesh.

Doareoù nevez da stourm a zo bet studiet e-kerz an Dacl. Kelaouet e voc'h e koulz, n'ho pet ket aon !

## ● - PANELLOU - LEC'H

Boulc'het mat eo ar stourm-mañ endeo. E-pad pellik (re bell?) ez eus bet klasket pouezañ jentil ha seven war gargidi ar Stad ha dilennidi ar bobl evit ma lakfent er pleustr o c'homzoù brav. Gant Skol An Emsav ez eus bet roet lañs d'ur reizhadeg vras gant lizherennoù da spegañ. Labour brav ha naet. Da heul ez eus bet manifestadeg Kemper gant panelloù deut eus Breizh a-bezh ! Echuet o deus "o servij" dirak prefeti Kemper...

N'eo ket bet trawalc'h. Ret eo deomp mont pelloc'h. Ha graet e vo.

Diriskl ne vo ket ar stourm, avat. Klevet 'vo brezhoneg e lezioù-barn ar vro e 1984, moarvat.

Kembre a vez kemeret da skouer gant Breizhiz, alies. Ha gouzout a rit ez eus tremenet un 200 den bennak el lezioù-barn e-kerz stourmadeg ar panelloù-hent, etre 1969 ha 1973 ? Ha gouzout a rit eo degadoù a dud a zo aet e kac'harioù ar Rouanez war-lerc'h 1973 ?

Ar pezh int deut a-benn da gaout en o bro n'eo ket bet profet dezho. Diframmet eo bet gant Kembreiz, ur youl dibleg ganto. Deomp da vezañ mennet ken start, hag ez imp war-raok ivez.

## ▶ PENAOS KEMEROUT PERZH ? ◀

Ar pep gwellañ, eveljust, a vo dont da labourat ganeomp. Ha labourat, ha n'eo ket magañ soñjoù du pe wenn a vo graet !

Ma n'oc'h ket evit dont da labourat ganeomp e c'hellit ober un dra a-bouez c'hoazh. Skoazellañ ar stourm o kas arc'hant deomp, 150 lur da vihanañ.

## ▶ DA BETRA E SERVIJO AN' ARC'HANT ? ◀

Da gas war-raok an daou stourm meneget uheloc'h, HA DA SE HEPKEN e servijo an arc'hant. Embannet e vo ar c'hontoù e-barzh BREMAÑ deoc'h da c'houzout petra 'vo bet graet gant hoc'h arc'hant.

**KELAOUET E VOC'H** dre ma vo kaset 12 niverenn eus BREMAÑ deoc'h EVIT NETRA, ma n'oc'h ket komanantet c'hoazh. Ma'z oc'h komanantet dija, kasit deomp chomlec'h ur mignon(ez) a vefe plijet o resev BREMAÑ. Kaset 'vo dezhañ.

150 lur pe ouzhpenn. Ha goulenn re eo ? Evit palioù ken sklaer ha ken pouezus, ne gav ket deomp. Fiziañs hon eus e vo niverus eta, ar re a soñjo : "Arabab da lañs an advrezhonekaat bezañ torret. Arabat eo e vije labour aner labour DIWAN. Tremen poent eo mont buanoc'h. Sikourmp Skol An Emsav".

- - M'ho peus tra pe dra da c'houlenn, ma rit ho soñj emezelañ, skrivit da :  
Skol An Emsav  
8 straed Hoche  
35000 ROAZHON

- - M'ho peus c'hoant skoazellañ kasit ur chekenn da :  
STOURMAD-HARV 83  
Skol An Emsav  
8 straed Hoche  
35000 ROAZHON  
Pellg. (99) 30.90.15



kartennoù-post gwerzhet gant S.A.E.



## LIVAN AR BED... E DU

**G**oude bezañ bet o c'houlenn, o c'hortoz, goude bezañ aozet ur begadeg vras e derou 1982, manifestet gant panelloù diviñset e Kemper e miz Kerzu, (en aner eveljust), e kave dimp, tud Skol An Emsav, e rankemp kreñvaat ar stourm.

Setu m'hon eus votet e-kerz hon Dael diwezhañ, d'an 19 a viz Even en Oriant, mont da goltariñ panelloù-hent pennañ hon bro, hag ar panelloù foran a vez kavet er c'hêrioù. Roet vo lañs d'ar c'hampagn nevez-se da vare hanter Gouere : pep hini gant

e wispon hag e bodad koltar (pe "Black" mar karit) neuze!

Un adkrog gant stourm ar panelloù eo eta, met da vezañ kaset da benn ar wech-mañ ; betek an trec'h ; betek ma vo degemeret an divyezhegezh klok war vord hon hentoù, pazenn gentañ war du implij ar brezhoneg evel yezh kevredigezhel.

Deuit ganimp ha stourmit ganimp !

H. ar Bihan



kartennoù-post SAE



R.B.O. ALOUBET

DISENTERIEN : 16 MIZ EO AR PRIZ



Ranket en deus Chapelain, kazetenner R.B.O., chom a sav e-kerz abadenñ keleier kreisteir hanter.

D'ar Sadorn 25 a viz Even e voe troc'het trumm skingasadennoù Radio Bretagne Ouest e Kemper, dres da vare ar c'heleier e galleg, da greisteiz hanter. Hag e c'hellas ar selaoerien klevout kement-mañ : "Rankout a reomp chom a sav dea m'eo bet aloubet ar studio gant un dourmad a stourmerien eus an strollad politikel EMGANN (Mev evit Deubidigezh Vroadel Pobl Vreizh hag an Emrenesezh Sokialour)."

Goude un tamm tabut etre ar re-mañ ha MAggy Gilbert, penn-kazetenneres nevez R.B.O. ec'h asantas houmañ da skignañ daou bennad-kaoz, unan e brezhoneg hag unan e galleg, da reiñ ar gomz da Emgann. Peh a voe graet da 6 eur 1/4 ha 6 eur 1/2 diouzh an noz. Ha d'ar Sul diouzh ar beure. Setu amañ ar pezh o doa c'hoant stourmerien Emgann kement d'ar selaoerien:

"Bre aloubiñ studio R.B.O. e fell da EMGANN sevel a-enep d'an deare m'eo bet savet radio digreizennet "Radio-France" e Kemper. Degas a ra Emgann da soñj eo bet an emsav politikel nemetañ o sevel sklaer, adalek ar 27 a viz Gouere 1982, a-enep da R.B.O. D'hor soñj, n'hell ket respont da ezhommoù hon fobl evit pezh a sell ar skingomz abalamour da ziviz renerien Bariz:

... chom hep derc'hel stad eus ar radiooù bro ha lec'hel a zo dija (kevrennet e-barzh kevreded Radio Lec'h ha Bro e Breizh).

... mont a-enep kinnigoù darn vrasañ ar c'hevredigezhioù sevenadurel hag ar strolladoù politikel, bodet e-barzh an Talbenn Sevenadurel Araokour (gant ar F.S. e-barzh ! ) hag a c'houlenn na vefe savet ur servij radio-tele, lies-stumm demokratel war Vreizh a-bezh.

... chom hep seveniñ promesoù Kuzul General Penn ar Bed da skignañ 500 a vrezhoneg bender.

... terriñ unvaniezh hor Bro muioc'h c'hoazh eget arak e teir lodenn bremañ e lec'h 21, ... postañ kalz re nebeut a arc'hant da brenañ mekanikoù, kirri-tan...da baeañ tud, da stummañ anezhe.

Goude bezañ bet ur radio deparant, daoust hag eñ e teuy R.B.O. da vevañ "Radio-Kemper" ? War se e sav Emgann

a-du gant an implijidi a stourm gant o sindikadoù a-enep da bolitikerezh Pariz.

Ouzhpenn-se ne vez skingnet tra met un eurvezh klok a vrezhoneg war ar pender, en tu hont d'ar pemp kazetennerg gwall dreut.

-Ne c'hell ket hon c'henvroidi eus ar Reter klevet an abadennoù brezhoneg peogwir ne vezont ket adskignet. Se a dalv ivez evit ar Vretoned divroet hag an estrenien o deus ar gwir da glevout brezhoneg evel ar re all.

-N'eus ket a abadenñ vrezhoneg ken d'ar Sul vintin.

Goullenn a ra Emgann hag eñ eo gwir : -emañ abadenñ ar sadorn vintin en arvar da vont da get... e vo lammet kuit an abadenñ holl vrezhoneg nemeti (war ar pender) ? -ez eus bet roet urzhioù gant renerien Bariz da chom hep skignañ kemenoù Emgann ?

Prest eo Emgann da larout e soñj dirak ar mikro, pezh 'zo bet nac'het betekhen : d'ober kinnigoù resis, en dro d'un daol, a-gevret gant ar strolladoù, ar c'hevredigezhioù, ar selaoerien kement war ar stumm ha war an danvez (plas ar brezhoneg-kulier ar c'hargoù, stummadur an implijidi, roll an abadennoù, an demokratelezh diabarzh...)

Ne fell ket da Emgann tagañ micherourien R.B.O. a glask ober o labour ar gwellañ posubl hag a ra berzh alies daoust d'ar skoilhoù a vez war o hent abalamour da renerien Bariz.

Fellout a ra da Emgann ma vo savet ur gwir radio evit ar vro a-bezh, a calc'hfe stad eus hon bro evel m'emañ war an dachenn bolitikel, yezhel, sevenadurel hag a c'hell bezañ klevet gant ar Vretoned divroet hag an estrenien. Ma vo savet meur a studio, ouzhpenn Kemper ha Roazhon (Brest, Lannuon, Sant Brieg, Sant Malo, Karaez, An Oriant, Gwened, Redon, Naoned... ) diazezet war framm ar radiooù lec'hel a zo dija. (Ha, reiñ d'ar re-mañ ur gwir statud a servij foran hag o emrenerezh).

Emgann. (Le Squern-Plougin)

Roazhon, d'ar Meurzh 21.06.83

Hiziv, eil prosez disenterien ar MIB abaoe diskar an TPFA. Goude Chaillou ha Becheneg, Naonediz, e miz Meurzh, setu tro Bernez Boulc'h, Brestad, 21 bloaz, o yunañ gant e gamaradoù abaoe 16 devezh (ar 6 a viz Even), en o zoull e Roazhon, evit goullenn ar statud prizonidi bolitikel.

Evit ar prizoniad politikel-se eo deus un 60 archer -2 gi-bleiz- o genou distag, na bouezint ket da yudal, hag un 50 arvester bennak a zo lezet ar wech-mañ da dremen didrabas.

An testoù, evel ar wech diwezhañ, a gomz eus gwaskezh ekonomikel, politikel, sevenadurel. Unan anezhe, Jil SERVAT, ar c'haner, a ginnigo al levr "Comment peut-on être Breton" d'ar Prezidant Delouevreur.

Evel e miz Meurzh e teu Herve Kerrain da glask komz brezhoneg. Chouk, an alvoudak a c'houlenn ur jubennour. Ar Prezidant e fulor, a lar eo ret dezhañ prouñ ne oar ket galleg. Chouk a lar eo d'ar varnerien da brouñ. Kuitaat

a reont ar sal evit divizout ur pennad, a-raok diskleriañ: "Evel ar traostizien all en deus ranket ar test deshiñ galleg". Met deskiñ ne dalv ket gouzout, Aotrou Prezidant.

Galvet un test all : un Iwerzhonad. Ne gomz ket galleg. Galvet ur jubennour saozneg. A lar ne gomz ket an test en saozneg. Nec'het ar Prezidant, c'hoant gantañ e gas kuit. Met ur jubennour gouezeleg zo aze, da zisplegañ en galleg fraezh d'ar Prezidant ne gav ket reizh an test e ve toull-bac'het tud evit o menzioù.

Da echuiñ e laro an alvoudak Bouessel du Bourg ne vez ket doujet gant Bro-C'hall ar yezhoù ha sevenadurioù all, ha Chouk a c'houlenn digant ar varnerien pe-seurt justiz emaint o soñj reiñ ma sentont ouz an Arme a-enep da Frankiz ar Menzioù, evel barnerien an TPFA.

Ar Prokuror a c'houlennno etre 18 hag 20 miz, war don priz al lur tomiz, evit un tamallad "pennek ha divorc'hed". Ar varn a vo diskleriet digwener, eme ar Prezidant. Hag an arvesterien da ganañ kan an ARB.

Un nebeut polizi livet en glas, gwenn, ha ruz a zo bet lezet da vale dindan fri an daou gi-bleiz. Dastumet e vezont gant an archerien. Unan anezhe (un archer) a glasko tapout ur paotr a oa o hisañ ar chas. E gamaradoù o sachañ er penn all a zeuio a-benn d'e zieubiñ.

Roazhon, d'ar Gwener 24.06.83

UR PEVARE PAOTR EN TOULL

Un dornad tud el Lezvarn hag un 10 archer bennak, ur c'hi bleiz staget e c'henou an dro-mañ. "Bernez Boulc'h, kabuls, 16 miz". Levr Morvan Lebesque a vez roet en-dro, hep gouzout hag eñ eo bet lennet. Ha kuit.

E-maes ar sal : "Ho pa-peroù, mar-plij". 5 archer a dap krog 'barzh Jean-François Bidault, disenter ivez, deut da selour ar varnidigezh. Gant sikour o c'hi-bleiz e teout a-benn d'e blantañ en o c'harr. Ur filmer eus FR3 a vez tennet e gamera digantañ. Bugalle saoz, o kemer luc'hskudennnoù a lak ur barner da fulorin.

Prosez a vo c'hoazh eta.

M.Kerrain



D'ar Merc'her o a viz Gouere, e toull-bac'h Fresnes, o deus pouezet Chaillou, Becheneg ha Boulc'h ar yun kroget gante d'ar 6 a viz Even e toull-bac'h Roazhon. Adkaset e vint da Vreizh, hep ar statud politikel a c'houlennet. Ouzhpenn SPV hag Emgann, o deus embannet Skol An Emsav, UDB, hag ar SGEN-CFDT e oa ret reiñ dezho ar statud-se.

Koulskoude o devo ar gwir d'en em vodañ ha da gaout kentelioù brezhoneg, gant ur c'helenner deus an diavaez.

\*\*\*\*\*  
Herve Barry ha Fulub Launay liverien mogerioù Lezvarn Foujera zo bet lezet da vont didrabas.

\*\*\*\*\*  
Mark Kerrain.



goullennit kartennoù-post Skol An Emsav 2,50 unan (10 lur ar 5)

# PERAK STOURM EVIT AN ADUNVANIDIGEZH ?

**G**ant ar pennad-mañ, si-  
net gant Per ar Run, e krog  
niverenn 3 kazetenn ar CUAB,  
"Le Courrier de l'Unité".



"Perak stourm ? Evit  
mestroniañ gwelloc'h hon fla-  
nedenn, evit diorren hon fin-  
vidigezh naturel ha denel,  
lezet re bell a-gostez.

Hor bet soñj : en 19-  
vet kantved e kouezhas hor rann-  
vro e c'hoari ar reizhad ar-  
merzhel frankizour. Evel se  
eo e voe skubet kuit 100.000  
gwiader gant kevezerezh la-  
bouradegoù an "Nord", hep na  
voe klasket arnevesaat hor  
gwiaderezh na sevel ijinerezh-  
zhioù all. Breizh dinerzheta  
a zeuas neuze da vezañ un da-  
c'henn divroañ, un douar paou-  
rentez war-lerc'h peurset  
Kornog-Europa, pa oa bet unan  
eus he frovinoù pinvidikañ.



Lodennet ma oa he depar-  
tamantou, ne c'halle mui  
Breizh stourm ouzh ar galloud  
kreiz. Abaoe ar bloavezhioù  
50, pa zihunas ar rannvro,  
dreist-holl gant ar CELIB, ha  
goude stourmadoù hir ha ka-  
let, e voe tu da c'honit sta-  
liadurioù ha postadurioù ar-  
c'hant dereatoc'h e-keñver  
pouez ar boblañs. E 1962,  
gant Stourm an Hent-Houarn e  
voe reizhet politikerezh pri-  
zioù an SNCF a sac'he Breizh  
muioù c'hoazh. E Mae 1968,  
gant un harz-labour rannvroel  
e voe gonestet ar "Plan Rou-  
tier Breton" (Steuñv Hentoù  
Breizh) ha porzh Rosko.

Met pa vez kreñvoc'h an  
disenglev en hon touez, e vez  
techet ar galloud-kreiz da  
adkemer ar pezh en doa ranket  
reiñ gant bec'h ar boblañs.  
Ar Steuñv-Hentoù a oa da vez-  
zañ echu e 1975 : met daoust  
hag echuet e vo a-benn 1985.  
Hiziv n'emañ ket Breizh e  
penn roll al labourioù da ve-  
zañ sevenet hervez dihellou-  
prientiñ an 9-<sup>vet</sup> Steuñv, pa  
oa 162.000 a dud dilabour e  
miz Here 1982, da larout eo  
11,6% eus ar boblañs, (pa ne  
oa nemet 9,9% e Bro-Loren, a  
vez kinniget dimp evel ur vro  
reuzedik, ret d'ar Frañs a-  
bezh mont d'he sikour.)

Unan eus abegoù padus  
hon gwander eo ar rannadur  
melestradurel... Dirak Pariz  
ne gomz ket Naoned ha Roazhon  
a-unvouezh. Bruznet eta ar-  
c'hadennoù Breizh. Penaos e  
c'hallfe ar Rannvro Breizh  
kaout ur steuñv-energiezh  
kempeoll, pa vez ar bras eus  
ar produñ e Bro-Naoned ? Pe-  
naos e ve savet ur steuñv-  
diorren ar porzhioù hep der-  
c'hel kont eus genou al Liger  
a vo difennet gant tud ar  
"Peideuloar", ha n'int ket  
Arvoriz. Digempeoll ha di-  
skiant...

AR STOURM EVIT AN ADUN-  
VANIDIGEZH ZO UNAN EUS  
DOAREOÙ AR STOURM A RANK AR  
VRETONED KAS DA BENN MA FELL  
DEZHO "BEVAN EN O BRO" HAG  
EVIT MA VO DOUJET O SEVENADUR  
HAG O FERSONELEZH.

Biken ne vimp re greñv  
evit eilpenañ red an darvoud-  
où er rannvro, dinerzheta  
goude kement a vloavezhioù  
kreizennerezh ekonomikel ha  
politikel. Biken ne vimp re  
greñv evit stagañ gant an  
diorreadeg ekonomikel ha se-  
venadurel a c'hallimp boul-  
c'hañ e-kerz ar c'hempennadur  
rannvroel. Nann, n'hallomp  
ket tremen hep an nerzh eko-  
nomikel a zeuio diwar an  
adunvanidigezh. Evel un dorn  
eo Breizh, ha n'halla ket la-  
bourat ervat ma vez troc'h et  
he biz-meud. Bro Naoned.

Hep Liger Atlantel ne vo  
ket gwanoc'h ar "Peideu-  
loar", n'eo ket ken gwazh an  
traoù enno hag e Breizh (ne-  
beutoc'h a zilabour). Dior-  
readur ekonomikel Naoned ha  
Roazhon a raio vad d'ar vro  
etre Breizh ha Pariz, pa ne  
rafe ket ar c'hontrol : dior-  
readur ar Mañs n'en deus ket  
graet vad da Vreizh.

Kenskoazell zo etre daou  
departamant Bro-Savoa e-  
diabarzh ar rannvro "Rhône-  
Alpes". Mat-kaer ! Met dis-  
heñvel eo an degouezh amañ.  
Goulenñ a reomp e vo graet an  
dilennadeg rannvro e fram-  
m Breizh adunvanet. Ha n'eus  
forzh penaos n'houlomp ket e  
vefe goulennet digant tud Bro  
Naoned dilenn kuzulierien  
evit ur Gembr "Peideuloar",  
gant m'eo bet ar rannvro-se  
gant un taol sizailh.

Evit mirout ouzh an tao-  
liou-itrik-se e labour hon  
c'huzulioù-lec'h da emouezañ  
ar boblañs hag he dileuridi.  
E penn ar striv pemdezic-se  
emañ an trec'h."

Sikourit "Le courrier de  
l'Unité", kelc'h lizher tri-  
miziek ar CUAB (1, ru Gretry-  
44000 - NAONED)-20 lur ar 4  
niverenn).

# DIWAN



## E PARIZ

DAOUST HA DERC'HEL  
A RAIO  
AR GOARNAMANT  
D'E BROMESAOU ??

## E BREIZH

DAOUST HA DERC'HEL  
A RAIO  
HON DILEURIDI  
D' OBER  
GOAP ?

**A**raok mont da brezidant,  
Fañch Mitterand en doa lava-  
ret a-zivout ar skolioù a ve-  
ze graet enno gant ur yezh  
estregt ar galleg, evel ar  
brezhoneg da skouer, e vefe  
tu, dre ar politikerezh nevez  
edo e soñj diazezañ, da gens-  
tagañ anezho ouzh ur servij  
publik renevezet hag a rofe  
tro dezho da genderc'hel gant  
o doareoù pedagogel.

Daou vloaz war-lerc'h  
emañ atav DIWAN, SEASKA, BRES-  
SOLA, CALANDRETTE, SCOLA COR-  
SA, o c'hortoz sinañ ur g e-  
vrad.

Kuzul Ren Diwan, bodet  
e Sant-Brieg d'an 18 a viz E-  
ven en deus klemmet dirak ke-  
ment-se. Hervez an Englev si-  
net e miz C'hwevrer e ranke  
ar c'hevrad a oa bet prometet  
talvezout adal miz Gwengolo o  
tont. Setu erru an hañv, ha  
n'eus tra war wel. Gortoz pell  
...Gortoz gwel...

D'an 18 a viz Even, Ku-  
zulioù Skoazell Landi ha Fou-  
enan a oa aotreet gant Kuzul  
Ren Diwan da zigeriñ ur skol  
nevez e miz Gwengolo 1983.

Kuzul Skoazell Landi en  
doa kavet ur sal e Lok Eginer  
e-lec'h ma oa bet ur skol 20  
vloaz 'zo. Ne oa ket skol e-  
bet ken e Lok Eginer abaoe.  
Setu ha goulennet eo bet di-  
gant an Ti-Kêr kaout ar sal-  
se ; daoust ma oa evit ur mi-  
lion hanter a frejoù evit  
foc'h adkempenn. Lavaret en  
doa Diwan e kemerfe ar frejoù  
war e cheuk.

Kuzul Kêr Lok Eginer a  
zo deuet a-benn da nac'h me-  
mestra. Div wech eo bet votet  
moken. An dro gentañ, hanter-  
hanter. Met arak an eil tro,  
edo en emgavet maer Plouziri  
ha Kuzulier Jeneral ar c'hant-  
ton, an Ao. Abegouille (Mab Egi-  
le m'ho peus c'hoant) maer ar  
Merzher.

Evit toare, an daou-mañ  
o dije displeget ken kaer pe-  
naos o doa aon e vefe dizert-  
tet skolioù o farrez gant ar  
vugale o vont da skol Diwan,  
ma 'z int bet heuliet gant  
Kuzul Kêr Lok Eginer. E Foue-  
nan, ar C'huzul Skoazell a oa  
aet e darempred gant maer  
Pleuven hag hini Fouenan. An  
darempredoù a oa mat kaer :  
"Sur e vije kavet ur sal en  
un tu bennak". Met arak ar  
vot e Pleuven eo bet goulenn-  
net ali ar skolaerien hag  
heuliet eo bet : skol ebet e-  
vit Diwan.

E Fouenan, memes ton ha  
kreñvoc'h memes rak embannet  
'z eus bet gant Kuzul ar sko-  
liou lik ne felle ket dezhañ  
e tigorfe ur skol Diwan. Vot  
ar C'huzul Kêr a zo savet a-  
du gantañ ivez.

Peadra a zo da soñjal e-  
ta ec'h echuo prestik ha di-  
zale ar brezel etre ar skol  
lik hag ar skol brevez, unan-  
net ma vint dirak o enebour  
dezho o ziv : SKOL DIWAN an  
hini 'vo.

Jil Killeverre.

**D**'ar sadorn 25 a viz  
Even e oa 2500 a dud o  
vanifestiñ e kêr Vaiona  
evit an 31 a Ikastolok  
bodet er gevredigezh Se-  
aska, ha 700 skoliad en-  
no. Dre ziouer a ar-  
c'hant e ranko SEASKA  
skarzhafi 46 eus he 62  
implijad e miz Gouere.





# AR BREZHONEG ER SKOL EVIT



evel-se, tamm brezhoneg ebet. Goulenn : Ha kelennet 'vez ar brezhoneg er skolioù-babiged, Ao. Rektor ?

Lakaomp en deus bet Yann mil chañs da gaout teir eurvezh a vrezhoneg. Setu en er c'hwec'hvet klas. Aze e vo cheñchet tren : 1) ret da Yann Klask nav bugel all c'hoant gante deskiñ hon yezh (nemet ha graet mat e vefe ar c'helaouiñ ofisiel, pezh so ral). 2) ret kaout ur c'helenner barrek da gomz brezhoneg, forzh pehini 'vefe e zañvez-arbennik (embregerezh-korf, galleg, jedonezh...ne vern). 3) ret da hennezh (honvezh) bezañ stummet da gelenn hon yezh. 4) ret dezhañ (dezhi) kaout ar c'hoant d'hen ober. Anez da se, tamm brezhoneg ebet. An hevelep skolioù a gaver bewech ma cheñcher klas. N'heller ket reiñ da wir e vo dalc'het e 4vet pe 3vet klas gant ar c'hentelioù brezhoneg a veze e 6vet ha 5vet klas. Ha diwezhatoc'h betek ar vachelouriezh. Ret mat gouzout n'eus netra o rediañ ur c'helenner, hag eñ brezhoneger, hag eñ stummet, ha goulennou a vefe, da gelenn brezhoneg ma ne fell ket dezhañ, o vezañ ma n'eo ket e dachenn labour. Goulenn : "Ha kelennet 'vez ar brezhoneg er skolioù eil-derezh, Ao. Rektor ?

Tremenet ar vachelouriezh gant Yann. Setu en er Skol-Veur, c'hoant gantañ dont da vezañ kelenner war ar brezhoneg. "N'eo ket posubl a vez laret dezhañ, n'eus ket a gelennerien war ar brezhoneg. Ret 'vo dit bezañ kelenner un dra bennak all arak ha goude e ri brezhoneg !". Tu 'vo dezhañ, d'ar muiañ, tremen un aotreegezh (gounezet e 1981 goude ma oa bet an tu kleiz e penn an traoù e-pad bloavezhioù abaoe Jules Ferry !), met ket ar c'h-CAPEs an arnodenn nemeti a c'hellfe krouiñ plasoù-labour. Ur gwir gelenner war ar brezhoneg a zo deut da vezañ, abaoe "E.T." (ha gwelet ho peus ar film Ao. Rektor) raloc'h eget un "den bihan glas".

Ac'hanta, bezomp sirius hag anzavomp an traoù da gemañ titloù ar c'hazetennoù : "Ne vez ket c'hoazh kelennet hon yezh adalek ar skolioù-babiged betek ar skolioù-meur". O, evel-just, chifroù 'zo, kement-mañ a eurvezhioù amañ, kement-mañ a skolidi a ze... Prometet ez eus bet, token, 22 blas-labour evit 83/84 ! (en ur gontañ ar re a zo dija).

Touellerezh nemetken, setu petra eo kelennadurezh ar brezhoneg hiziv an deiz, touellerezh war zigarez ur fals-youl vat eus perzh ar skolidi eus an eil tu hag eus perzh ar gelennerien eus egile. Bis-koazh n'eo bet goulennet gant ar skolidi hag-eñ e c'hoantaent deskiñ an douaroniezh pe ar galleg er skol ? Hag ur referendon a oa bet aozet a-zivout ar skoliata dre red a-barzh sevel lesennoù Jules Ferry ? Den, koulskoude, ne gredfe lakaat anezho en arvar. Perak neuze lakaat ar re

a ginnigte an nevelep reoliadur evit hon yezh da dud breinet o spered gant menoziou hollvestroniel pe troet meaes war du ar faskegezh ? Se eo koulskoude ar pezh a hañval soñjal ar strolladoù hag ar c'hevredigezhioù bodet e-barzh an Talbenn Sevenadurel Araokour (ar P.S. o vezañ ezel anezhañ) hag a gred dezho e rank kelennerezh ar brezhoneg bezañ direk.

N'eo ket e kavont o gwalc'h er mod ma vez aozet an traoù er mare-mañ. Met derc'hel a reont da trediñ n'eus mann met ur reolenn da vezañ heuliet : "diret evit ar skolidi met ret evit ar skolioù". Da larout eo e rank kement skol bezañ prest da reiñ da gement skoliad tro da zeskiñ hon yezh ma fell dezhañ. Kin-nigoù huñvreerien a ziskouez bezañ dizek war ar mod ma ya an traoù en dro er velestradurezh hag en deskadurezh a larer "broadel". Ha tu 'zo da ijinañ e c'hellfe ar velestradurezh-se krouiñ plasoù-labour kement ha bezañ prest da seveniñ "an ezhommoù"?

O vezañ ma vez lakaet youl-vat ar skolidi da reolenn, n'heller ket diogeliñ e vo kement a skolidi o c'houlenn brezhoneg er c'hlas diwezhañ hag er 6vet klas. Ma vefe daougementet o niver ur bloavezh, da belec'h e yafed da glask ar gelennerien ? Ma ne vefe ket anezho ken, daoust hag-eñ e vefe miret o flas-labour d'ar gelennerien-

se, betegout e kreskfe ar goulenn adarre, ar bloaz war-lerc'h da skouer ?

## UN DISKOULM HEPKEN

Un diskoulm a zo koulskoude. Un diskoulm hepken. D'ar goulenn : "Penaos kelenn ar brezhoneg ?" eo trawalc'h respont : "Ret eo kelenn ar brezhoneg". Eeun tre an traoù.

Kelenn ar brezhoneg a dalv e vefe lakaet ar brezhoneg da zañvez-kelenn evel ar re all, er roll labour reizh ha boutin, en holl liveoù, eus ar skolioù-babiged d'ar Skol-Veur. Kement-se a dalv e vo ret stummet kelennerien war ar brezhoneg gant ar c'h-CAPEs brezhoneg pe an arnodenn heñvel e skol ar vistri.

N'eo nemet dre heuliañ ar politikerezh-se e vo tu da vezañ stag ouzh ar fedoù, e-fedus ha da grouiñ plasoù-labour. Gant se e vo roet tro da gas da galz a Vretoned yaouank da chom e Breizh da labourat ha da vevañ. Eemplegañ a ra evel-just e vo ret stourm a-enep da unan eus startañ pennaennoù an "unvaniezh vroadel" a laka kement kargad da vont ha da zont e-diabarzh harzoù ar c'hwec'h-korn. (Hag anvet 'vez arche-rienn-a-vor e Tourcoing ha chaseourien-alpat e Gwitevede ?).

Hiziv an deiz e vez kelennet ar brezhoneg en holl skolioù, adalek ar skolioù-babiged betek ar skolioù-meur. Sed aze an titl a c'helled lenn e-barzh kelaouennoù Breizh un deiz eus diskar-amzer ar bloavezh 82, war-lerc'h divizoù an Ao. Savary, bet kemeret goude ma voe graet un termen d'an emvod bet aozet gant an Ao. Rollin, Rektor Akademiezh Roazhon. Sed aze an enep-gwirionez a voe skignet dre holl gant ar c'hazetennoù hag ar media. Ma pa vez embannet ur seurt enep-gwirionez, en ur c'houzout ervat, e vez graet ur gaou eus se. Piv a oar gwelloc'h eget an Ao. Rollin n'eo an diskleriadur-se tra met touellerezh da lakaat hon Fobl da grediñ e oa ar gournamant neves o vont d'ober ar c'hontrol-fed eus ar pezh a oa bet graet gant egile : saveteiñ hon yezh vroadel dre reiñ dezhi ur gwir "statud"?

Ar mintin-se ez eas Maïjan war he c'hiz, he belo dindani hag en ur droadikel-lañ e lare dezhi hec'h-unan : "A, memestra, beav eo gwelout-se. Pa oan yaouank e veze dilennet kamz brezhoneg ha bremañ e c'heller deskiñ anezhañ e-barzh ar skol". Paour-kaezh Maïjan ! Paour-kaezh Fobl ac'hanomp, prest dalc'hmot da stlakañ he daouarn kerkent ha taolet un askorn dezhi da chaokat !

## TOUELLEREZH AR FALS-YOUL VAT

Yann, lakaomp, mab-bihan Maïjan, zo o vevañ en ur bourk bihan a Vreizh. E dud a blijfe dezho e teskfe ar brezhoneg kerkent hag erruet er skol-vabiged. Posubl eo, hervez an testennoù. Hogen 3 eurvezh ar sizhun d'ar muiañ ! Ha gant ma vo : 1) brezhoneger(ez) ar skolaer(ez), 2) stummet da gelenn hon yezh, 3) a youl vat, 4) a-du ar gerent all. Ma ne vez ket kont



AN HOLL

"Met neuze, a vo eilge-riet din, spontet, fellout a ra deoc'h lakaat ar brezhoneg er skol dre ret?" Petra 'zo kaoz e ranker kavout-se iskis? Ha diret eo daneg e skolioù Bro Zannmark pe an is-landeg e Bro Island? Ha goulenne re eo goulenne ma vefe kelennet hon yezh vroadel e- vit gwir en he bro?"

"Met fellout a ra deoc'h sevel ur "simbol" war an tu gini?" Anavezetat arguzenn! Breskat arguzenn! Disoñjal a reer ne ouie ar Vretoned yaouank tra met brezhoneg er mare-se. N'eo ket gwir ken. Disoñjal a reer un dra a-bouez bras. N'eo ket dre ma tesker ur yezh d'ar vugale, e redier anezho d'ober ganti dizezhatoc'h. Me-ma-unan am eus desket brezhoneg er gêr (evel reoù all!). Hogen n'eus den o rediañ ac'honan da gomz anezhañ bremañ. Ha rancout a rafeneb d'am zud: "Pa oan bihan ho peus rediet ac'honan da zeskiñ brezhoneg?" Piv a gredfe soñjal-se? Bremañ, avat, e c'hellan choaz. Ha trugarekaat a ran anezho o vevañ ma ouzon ervat pegen start eo deskiañ ur yezh dre vevañ desket reoù all abaoe."

Lavarout d'ar Vretoned yaouank ez int dieber sistem a-vremañ, diazezet war bennaenn ar youl-vat, da zeskiñ pe da chom hep deskiañ brezhoneg eo diskouez pe e zislaloded pe e eunevezh. Ar "frankiz"-se n'eo tra met kontrol ar frankiz, ne vern petra a soñjal an Ao. Rektor hag an holl re, plasat uhel er galloud, a ra pep tra da c'hounit amzer en ur c'hortoz gant spi an deiz ma vo ar "wraç'h" war he zalaroù.

Piv a gredfe larout e ranker gortoz ken na vo deut bras ar bugel da larout dezhañ? "Bremañ, ma fell dit, ez an da zeskiñ lenn pe skrivañ dit, pe sotoc'h c'hoazh, da zeskiñ komz dit?"

Se eo koulskoude emzalc'h pennoù bras ar velestradurezh c'hall e kenver ar Vretoned yaouank hag hon yezh! Peget c'hoazh e c'houzañvimp e vefe graet fae evel-se, war zigarez ur fals-spered a frankiz, war unan eus pennoù arouezioù hon broadelezh?

AR GWIR DA CHOAZ

Lakaat ar brezhoneg da zanvez-kelenn gwirion eus ar skolioù-babiged d'ar skolvereur a dalv: e ranker sevel ur gwir bolitikerezh a blasoù labour, da vevañ heuliet e barzh an XIvet raktres (1984-1988), e ranker sevel ur pezh sistem pedagogel (diplomoù, levrioù-skol, pladennoù, video, raktres-stummañ...). N'eo nemet goude ma vo bet lakaet kement-se war sav e vo tu da reiñ tro d'ar vugale d'ober ar gwir choaz:

- pe deskiañ ar brezhoneg, evel danvez a-hed ar bloavezhioù-skol,
- pe ober eus ar brezhoneg ur benvez-deskiñ evit an danvezioù all, evel ma vez graet gant ar c'hembraeg, an euskara

reg, ar flandrezeg, ar magyar, an ukraineg... Pevh a dalv e ranker lakaat ar brezhoneg da zanvez kelenn en holl skolioù kentañ derez, skolarjoù, liseoù hag evit ar re a vo er skolioù labour-douar, teknel, a vor...

Ar choaz-se nemetañ a c'hello kreataat ar frankiz hag an demokratelezh pe gwir e roio tro d'an holl vugale da zeskiñ brezhoneg ha n'eo ket hepken d'ur "vegenn", evel bremañ, a c'hell deskiañ hon yezh aesoc'h eget ar re all dre ma z'int genidik eus un tiegezh a gomz brezhoneg pe eus ar "metou desket".

Divizoù ret, divizoù mallus. Divizoù dic'houest, drezo o unan, da ziogeth e talc'ho hon yezh da vevañ. E-vel laret uheloc'h, n'eo ket travalc'h gouzout ur yezh evit ober ganti. An iwerzhoneg tost deomp, a zegas kement-mañ da soñj deomp. Buhez hon yezh n'eo ket stag ouz ar skol hepken met ouz he roll hag he flas er media, er gwask, er vuhez foran ha melestradurezh. Diouz ha servijo d'un dra bennak pe get.

Un deiz e vo ret respont da c'houlenn peurbadel hon c'henvroidi: "Ar brezhoneg? Brav tro! Met da betra e servij?" en ur mod all eget: "Ul lodenn eus madoù an denelezh eo ar brezhoneg, ma ne fell ket deomp e teufe da vevañ ur "yezh sevenadurel".

Da larout eo ur yezh "ouzhpenn", pe ur "yezh pompadour" evel ma vourre P.J. Helias o larout diwar-benn ar brezhoneg.

Ma fell deomp, er c'hontrol e chomfe ar brezhoneg da "yezh kevredigezhel", da larout eo yezh hon Fobl ha n'eo ket yezh un nebeud hiniennou nemetken, e vo ret deomp gounit an divizoù-se digant ar galloud ha reiñ lañs d'ur pezh-mell emsav poblek evit hon yezh.

Daoust hag en eo se an hini eo a fell deomp c'hoazh?

Herve Ar Beg.

Ret eo gouzout neuze e c'hallerien hervez al lezenn. Kaout brezhoneg er skol eil derez. (C.E.S. ha Lise):

1-adalek ar ovet klas evel danvez-diret (option facultative), da larout eo er-maez eus an eurioù reizh ceurvuiañ (a c'haller kregiñ n'eus forzh e pe vloavezh-studi).

2-adalek ar 4re klas vel danvez-dibabet dre ret (option obligatoire) e-lec'h latin, da skouer. (Neuze e vo marvat en eurioù reizh).

3-adalek ar 4re klas evel Eil Yezh (LVII). En eurioù reizh.

4-adalek an 21 klas evel Tredre Yezh (LVIII), evit ar rann-mad A3 hepken, en eurioù reizh.

Eveljust ne vez ket kinniget an dibaboù-se pa ne vez kelennet ebet, ha ne vez ket displeget alies d'ar skolidi ez eus tri dibab da skouer er 4re klas (1,2 ha 3).

KELEIER...

Nac'h et eo bet digant Antoine Texier, skolidi e Lise prevez Sant Varzhin e Roazon, ar gwir da ginnig brezhoneg evel Eil Yezh (LV2) er vachelouriezh. Ken en deus heñañ klemmet dirak Lezvarn ar Velestradurezh.

Hervez Unvaniezh ar Gelennerien Vrezhoneg e oa ar gwir da ginnig brezhoneg evel Eil Yezh abalamour da Garta Sevenadurel Giscard sinet gant ar Rannvro hag ar Stad e miz C'hwevrer 1978. Displeget e oa enni e oa tu da gregiñ gant an danvez-studi-se er 4re HAG en 3-de klas. Hervez ar Ministr ne vo posubl kinnig an Eil Yezh-se nemet a-benn bloaz, evel pa ne vije bet tu kregiñ ganti NEMET er 4-re klas e 1979.

N'eus forzh penaos eo tremezet ar vachelouriezh, ha ne oar ket pegouls e tey respont Lezvarn ar Velestradurezh.

**E**izh seurt bachelouriezh a zo. Ha posubl e vo kinnig brezhoneg en holl?

Hervez ma lar "Emgleo Breiz", ne vo posubl nemet evit 2 eus an 8 se. Rak gant an Aotrou C.Pair, Renier Al Liseoù, ez eus bet sinet un daolenn embannet war ar J.O. "Kazetenn Ofisiel" ha B.O. an Deskadurezh, o reiñ da c'houzout ne vo tu implijout ar brezhoneg evel Eil ha Tredre Yezh nemet er vachelouriezh A2 ha B.

Nac'h bet gant ar Ministr Aotragezh daoubennek Skol Veur Vrest a ginnig ar brezhoneg pe ar sevenadur evel pennandevizioù. "Ar stourm sevenadurel zo da ren atav", eme UDB.

Anvet eo bet ar gelennerien vrezhoneg en Deskadurezh. N'eo ket ar bloaz-mañ c'hoazh e c'halla tud eus an diavaez bezañ kemeret en Deskadurezh da gelen brezhoneg. N'eus hini ebet. Da betra 'ta emañ an aotragezh vrezhonek o vont da servij? Goulennit digant Jack Ralite, Sekretour-Stad al Labour.

Eus an tu all e vank tud evit kelenn brezhoneg... e Roazon, er c'hentañ derez. N'eo ket souezhus: ar Skol Normal eno ne stumm ket a skolaerien vrezhonek. Hag evit respont d'an ezhomm e vefe ret bezañ skolaer. Kinnig a rafemp eta kelenn ar brezhoneg e galleg. Un diskoulm all a zo: hini an APEEB, Kevredigezh Kerent Skolidi evit Kelenn ar Brezhoneg, a glask tud varrek d'ober al labour hag a baeo anezhe... e-lec'h an Deskadurezh.

BEP DAOU VIZ LENNIT AL LANV

KIJUMANANT BLOAZ 50 lur SKDAZELL adalek 100 lur.

da AL LANV 8 st. Enez Vaz 29000 KEMPER

BRO LEON, DOUAR AR BREZHONEG?



**K**rediñ a rafed ez eo Bro Leon ar vro e-lec'h ma vez kavet skolidi forzh peget evit heulian ar c'hentelioù brezhoneg pa vezont kinniget dezho er skolioù.

Ya, komzet e vez brezhoneg er vro-mañ, war ar maez, dreist-holl, er parker, war ar marc'hajoù, e-barzh an ostalerioù, kanet e vez c'hoazh un tammig e brezhoneg en ilizoù.

Pa lenner ar studiaden gant graet gant A.V. Arzur diwar-benn ar brezhoneg e parrez Plouviann, e Bro Leon, e weler emañ kazimant an holl dud eno "a-du" gant ar brezhoneg. Mar-teze e vije gwelloc'h lavaret n'emaint ket "a-enep", pe c'hoazh lavaret ez int "neptu", da lavaret eo e leuskont an traoù da vont. Plijout a ra dezho selaou sonerezh, kantikou, heulian abadennoù brezhoneg war ar radio pe an teile. Ar re yaouank dreist-holl eo a ro da c'houzout ar muiañ e fell dezho ma vije dalc'het mat d'ur brezhoneg.

Perak neuze ez a war fallaat kelennadurezh ar brezhoneg e skolioù Bro Leon?

Goulenn a ra ar strolladoù sevenadurel e Breiz ma vije savet ur "C'HAPES" brezhoneg da gas an traoù war-raok. Gwir eo, an dra-se a sikouro digeriñ doriol al liseoù hag ar skolarjoù d'ar re o deus en em stummet er skol Veur evit kelenn ar brezhoneg. Met daoust hag e vezo klask warno pa deuit war "marc'had al labour" gant o brezhoneg? Daoust hag ez eus un "ezhomm" diouz kostez an dud yaouank hag o familhoù? N'eus ket anat tamm ebet evidon.

Amañ e Bro Leon, bro ar skolioù prevez, ar brezhoneg n'eo ket strobot gant kudenn ar c'hapes er skolioù eil derez. Ne ranker ket gortoz ma vije krouet postoù er skolioù prevez. Pa fell d'ur c'helenner sammañ war e gein kelennadurezh ar brezhoneg e c'hell dont a-benn d'ober un dra bennak, met eveljust, dezhañ eo d'ober an enklaskoù er c'hlasoù, d'ober bruderezh ha da reiñ da gompren d'ar vugale e vo ret dezho, evit kaout brezhoneg, pe sevel a-bretoc'h pe verraat an ehan

da greisteiz. Tu 'zo d'ober un dra bennak memestra. Koulskoude ez a war zigreskiñ niver ar re yaouank a gemer brezhoneg evit ar "BAC". Ha, pezh zo gwashoc'h c'hoazh, o live a ya war fallaat, ha prest int c'hoazh, mar plij, da glask gounit "poutchoù" hep bezañ labourt tamm ebet, lod diouto. N'eo ket sur e vije c'hoazh kentelioù brezhoneg e skolarjoù Kastell pe Lesneven a-benn un nebeud bloavezhioù ac'h'alenn.

Er skolioù kentañ derez prevez e Bro Leon ez eus ur strollad skolaerien o labourat evit ar brezhoneg en-dro da Anna-Vari Arzur, Kuzulier-bedagogel. Un ugent bennak anezho a ra un eurvezh brezhoneg bemed en o c'hlas, ha klask a reont ivez ober gant ar brezhoneg pa vez posubl. Hervez am eus klevet, ecb' en em santont un tammig "o-unanig" o labourat war an dachenn, hag ar familhoù, peurliesañ a chom neptu.

N'em eus klevet anv ebet eus ar brezhoneg er skolioù-mamm. Daoust ha n'eo ket er c'hlasoù-se, koulskoude, e vez paket plegoù mat, pe fall, pa vez digor avaloc'h spered ar vugale evit ober gant div pe deir yezh hep en em c'houlenn ha labour "ouzhpenn" a vez roet dezho pa 'z a ar skolaer e brezhoneg?

Lennet am eus ivez en "Ero Nevez", e CFP Brest, (Skol Normal ar skolioù prevez), e kemer 50% eus an danvez-skolaerien brezhoneg e-giz "Unité facultative" evit an DEUG, e-lec'h ar saozneg. Sur eo, an dra-se 'zo mat, met da zivall o deus, pa vezint skolaerien, e vijent bet stummet evit kelenn ur yezh ha ne vo goulenne ebet eviti ken.

Evidon, n'eus nemet daou zoare da reiñ d'ar brezhoneg e blas er skolioù. Da gentañ e rankfe bezañ kelennet dre ret en holl skolioù. Met arabat huñvreal, ha neuze ne chom nemet un hent all evit dont a-benn: lakaat ar familhoù e-barzh an taol... ur wech all adarre. Ne vo ket posubl dezho chom "neptu" a gav din.

Jean-Michel Branellec. Kelenner e Bro Leon

29 A VIZ EOST  
4 A VIZ GWENGOLO

FESTIVAL  
DOUARNENEZ

AR POBLOU TSIGAN  
AR SINEMA BREIZHEK  
HA KELTIEK

**K**inniget e vo gant Festival Douarnenez ar poblou Tsigan, an orin a-nezho, o sevenadur, ar mod ma vezont diskouezet dre ar sinema...

Dont a ra ar filmoù kinniget eus ar Stadoù Unanet ha deus Europa: Moldavia, Ungaria, Yougoslavia, Bro-Alamagn, Bro-Suis, Bro-C'hall, Bro-Iwerzhon, ha Bro-Spagn.

E-touesk ar filmoù dibabet dija e kaver KRISS ROMANI gant Jean Schmidt, AN DSIKANED O VONT ETRZEK AN NEVEN gant Emile Loreanu, KEJET M' EUS GANT TSIGANED EURUS ZOKEN gant Petrovic, TRAVELLER gant Joe Comerford, TENERIDI gant Jean Ker-LE MEUR, LA FIANCEE gant Olivier Bourbeillon...

E keit-se e vo aozet diskouezadegoù poltriji ha livadurioù, ul levraoueg, ha

divizoù diwar-benn an istor, ar sevenadur Tsigan, al la-c'hadeg nazi hag ar mod ma vez degemeret an Dsiganed e Breizh ha dreist-holl e Penn-ar-Bed.

Evel bep bloaz e vo Devezh Breizh, (d'ar Gwener) hag ouzhpenn ar filmoù produet gant tud o-unan evel: ZONE LIMITE gant Yann Gicquel ha Frédéric Nery, LES ENFANTS DU SIECLE gant Thierry Le Merre, EQUINOXE gant Paul Cornet ha Jean Perrochaud, e vo diskouezet ar filmoù kentañ bet produet gant an A.R.C. (ATELIER REGIONAL DE CREATION CINEMATographique DE BRETAGNE), da lavarout eo: MONSIEUR TENDRE gant Christian Lejale, LE MISSIONNAIRE gant Jean Ker-LE MEUR, LA COURSE gant Olivier Bourbeillon...

Er wech ouzhpenn e roio FESTIVAL DOUARNENEZ lañs da filmoù ar vro, e mañ renerien ar salioù e soñj da ziskouez e Breizh a-bezh an dibab eus ar filmoù bet gwelet e-kerz an devezh breizhat. Er festival an devezh breizhat e rennerien ar val en em gavo renerien hag ar skignerien da zont an eil gant ar re all. Filmoù eus ar broioù keltiek a vo gwelet ivez, bemdez da 6 eur noz.

En o zouesk e kaver: LOCAL HERO gant Bill Forsyth, ANOTHER PLACE, ANOTHER TIME gant Michael Radford, CROSS AND PASSION gant Claire Pollack, THE SCHOONER gant Bill Mis-kelly, HOW TO BE CELTIC gant Douglas Eadie, JONI JONES gant Stephen Bayly, THE OUTCASTS gant John Davies...



Un diviz a vo gant Rener S4C ha Chapter Film Workshop (pedervet chadenn e kembreck ha stal-labour sinema eus Cardiff) e-pad an devezh-se.

E-barzh an MJC en em gavo ar bloaz-mañ diaporamaoù breizhat.

Savet eo bet ar festival-mañ sikour ar C.F.T. (Centre d'Etudes Tsiganes), Kêr Douarnenez, Centre National du Cinéma, Ministrerezh ar Sevenadur ha Renerzh-departamant an Amzer-Vak.

Ne oa ket moaien da gaozout ur Festival Tsigan hep sonerezh. Sonñ a raio ur strollad eus Kreiz-Europa, ur strollad jipsian hag ur strollad jazz.

Evit gouzout hirroc'h, skrivit da Festival de Cinema des Minorités Nationales - 11 bd C. Reaud - 29100-Douarnenez - pe pellgomzit d'an niver-mañ: 16(98) 92.10.07.

KIT  
DA WELET  
Cross and  
Passion  
by Claire  
POLLAK

PEUPLES  
TSIGANES  
D'EUROPE  
PEUPLE  
BRETON



29 AOUT  
4 SEPTEMBRE  
DOUARNENEZ

6<sup>ve</sup> FESTIVAL SINEMA Douarnenez



John Davis

Shell Shock Rock (1979) 50 min  
Protex Hurray (1980) 10 min  
Self Conscious Over You (1981)

the  
OUTCASTS

DOM-TOM 1980  
EN EMGAVIT ABRETOC'H  
AR BLOAZ-MAN

TRAVELLER



Joe COMERFORD



2, Straed ar P...



SAL





# STOURM A-ENEP AN ARME CHOM HEP OBER E GOÑJE

## ISTOR

Daoust ma n'int ket bet morse gwall niverus, ez eus bet atav hiniennou oc'h enebif ouzh an arme, ouzh ar brezel, o nac'h e brientif, o nac'h sentif ouzh ar Stad hag he servij gant armoù.

E Bro-C'hall eo aet an eneberezh a goustiañs war ziorren dreist-holl goude lazha-degoù ar brezel-bed kentañ, diwar intrudu anarkourien hag, alies ivez tud a relijion.

Azalek 1920 e krog peoc'hourien, anarkourien ha denelourien a-bep tu da stourm evit gouñt ur statud. Ret eo lavaret ez eus dija d'ar mare-se er broioù a hengoun brotestant, ur statud hervez al lezenn, dre ma 'z eo diorretoc'h marteze er broioù-se an doujañs ouzh an den.

E Bro C'hall e rankint gortoz 43 bloaz evit gwelet un dra bennak o tont. An danvez lezenn kentañ a ginnige ur statud a zo bet savet e 1937, ha meur a hini all a zo bet c'hoazh war-lerc'h betek 1963.

## brezel Aljeria

E-pad brezel Aljeria eo e tiwan da vat al luskad Galvet eo bet ar re a zo oc'h ober o c'hoñje da vont di pa n'int ket a-du tre gant ar brezel-se.

Keleier a seu en dro ganto ivez hag a lavar penaos e vez boureviet, lazhet ha gwastaet eno. Emsavioù kuzh a-enep ar servij soudard a vez savet evel "jeune résistance". 4000 den yaouank a gemer hent an disentiñ. Diouzh un tu all, ur 400 bennak a c'houlenn ar statud a-eneber a-goustiañs hag a vez kaset d'an toull-bac'h. Al lodenn vrasañ anezho a nac'h ober o c'hoñje evit abegou relijiel nemetken (Jehovah). Abalamour da se n'o deus tamm pouez politikel ebet.

Met ar pep brasañ eus ar re yaouank, hag emsaverien e-

nep an trevadenniñ anezho zoken, a gemer hent Bro-Aljeria. Dont a reont en dro brevet ha digalonekaet.

En emdroadur-se eo e vez kaset da vat ar stourm diwezhañ evit ar statud azalek 1957, gant tud evel LECOIN, emsaver anarkour, rener "Liberté" ha tud brudet evel Camus, Breton, Giono...

An objektourien neuze a vez kondaonet evit bezañ nac'h het sentif ouzh lezioù-barn an arme. Chom a reont en toull e-pad 5,7 ha 10 vloaz zoken.

E-pad ar brezel, ne fell ket d'ar gouarnamant plegañ e gorn (nemet azalek 1958 e vo dieubet ar re o deus tremenet ouzhpenn 5 bloaz en toull).

Goude ar brezel, ec'h a-santo kendivizout memestra un tammig, pa velo al luskad o vont war gresk. Met n'eo ken nemet pa grogo Louis LECOIN, 74 vloaz, gant un harz-debriñ didermen d'ar lañ a viz Even 1962, e tegemero menoz ar statud.

Un danvez lezenn kinniget gant al luskad a vezo tabutet warni er Parlamant e miz Gouere 1963. Un destenn verraet ha lammet ar pep pouezusañ diouti eo a vo votet da lezenn d'an 21 a viz Kerzu 1963.

## 1963-1981

Daoust ma oa al lezenn-se ur c'hammed bras war-raok, pep tra enni a glaske mirout ne'z afe war gresk niver an eneberien a goustiañs :

-Ne c'heller goulenñ ar statud nemet evit abegou prederrouriel pe relijiel.

-Ne vez tu da c'houlenn anezhañ nemet e-pad 15 devezh eus e vuhez den.

-An amzer goñje a zo div wech hiroc'h evit hini ar servij soudard.

-Difennet eo ober bruderezh evit al lezenn.

-An objektourien a zo dindan beli lezioù-barn an arme.

Daoust da se, daoust ivez ma ne oa ket gwall anavezet an doare da c'houlenn ar statud e mesk ar re yaouank, un toulladig a objektourien a gavo aze an doare da gender-c'hel gant ar stourm a-enep an arme hep bezañ kaset d'an toullbac'h war-eeun. Klask a raint e-ser, gwellaat ar statud dre ar stourm.

## abegou politikel

Goude 1968, e vo muioc'h mui a objektourien o c'houlenn ar statud evit abegou politikel. Eveljust ne vint ket degemeret mat gant ar bodad a ziviz reiñ pe nac'h ar statud. Nac'h et e vo bep tro hag an objektourien a zeuio da vezañ disentidi, kondaonet da 2 vloaz toullbac'h.

## OP 20

E miz Du 1971, evit diskouez e ra pezh a gar ar bodad-se gant an abegou roet gant an objektourien, un gent bennak anezho a ziviz kas ar memes lizher dezhañ. An OP20 a oa ganet. Trumm war lerc'h eo ur c'hant bennak a gemer an doare ober-se.

Ur 500 bennak en holl o devo ar statud dre an OP20. Un toullad a'z aio en toull memestra war-lerc'h 1975.

## 1981, an tu kleiz e-barzh

Fañch Mitterrand en emgavet en Elysée, e vo dieubet al lodenn vrasañ eus an objektourien a oa en toull ha lezet ar re all e peoc'h da c'hortoz e vije savet ul lezenn all.

1983,

## ul lezenn nevez

Goude 2 vloaz eta, ul lezenn nevez a zo bet votet gant ar Parlamant. Daoust ma n'eo ket direbech ha pell a-lese ez eo ur c'hammed all abouez.

Tu a zo hiziv eta da gement hini o stourm enep an arme da c'houlenn ar statud objektour ha d'e gaout. Kasetennoù 'zo o deus embannet e veze roet anezhañ bremañ en

un doare "kazi otomatek". N'eus ket a "gazi" ebet. Neb a glasko en devo, gant ma heulio strizh ar pezh a lavar al lezenn ha gant ma raio zoken e c'houlenn an ecunañ posubl, da lavaret eo ma kemer da skouer un destenn verr ha boutin d'an holl (evel m'he deus lavaret an hini a ginnige ar raktres lezenn).

Er c'hontrol, sañset, hiziv, eo ar re a glaskfe arguzenniñ o emzalc'h a c'hellfe bezañ nac'h het outo ar statud. Pilpouzerzh eveljust ! Met netra ken ne dlefe mirout ouzh den da gaout ar statud en ur gemeret lizher an OP20 da skouer.



Aotrou Ministr,

DISKLERIAN A RAN BEZAN, EZ PERSONEL HAG EVIT ABEGOU A GOUSTIANS, A ENEP IMPLIJ AN ARMOU. GOULENN A RAN ETA E VEFE LAKAET DANVEZ AL LEZENN DIWAR-BENN AN ENEBEREZH A GOUSTIANS DA DALVEZOUT EVIDON.

Degemerit, Aotrou Ministr, va gwellañ gourc'hemennoù

An re o dije c'hoant gouzout hir oc'h war an doare ober a c'hell skrivañ da :

Jil Killevere - Kervaidig - 29229 - Plourzel -

## RADIO PAYS




Radio-Pays a zo ur gevredigezh bet savet e Pariz ha diskleriet d'ar 24 a viz Ebrel 1982 evit sevel ur radio a vefe "mouezh sevenadurioù ha yezhoù pobloù ar Frañs". Bodañ a ra Breizhiz, Korsikiz, Elzasiz, Euskariz, Oksitaniz, Katalaniz, Flandreziz.

"E-mod-se", emezo, "e vo lakaet fin d'ar stad mantrus ma ne c'hell ket milionoù a dud o vevañ e rannvro Bariz klevout abadennoù radio e yezh o c'havell ha kaout keleier eus o bro, hag eus buhez o c'hevredigezhioù e Pariz".

N'eo ket bet roet ar gwir da implij ar gwagennoù eus an taol kentañ hag ur c'hampagn zo bet graet en Nevez-Amzer 1983, evit goulenñ





# felipe gonzález AR BOUREV



Gant Justo de la Cuerva Alonso (sokiologour, bet ezel eus ar PSOE)

Kamarad,

Ec'h an da c'houlenn diganit strivañ da lenn al linennoù-mañ, evel ma strivante d'o skrivañ, evit ma yadfe da gonnar, da heug ha da rukun.

Ec'h aomp da gomz diwar an divout-se, rak komz diwar-nañ a rankomp, met klaskomp chom sioul hag ober un dezrann bolitikel, un dezrann a renkad.

Ken sirius, ken grevus an danvez, ken e ranker mont dezhañ gant ar brasañ evezh, ar vrasañ emvestroni.

Sirius an danvez, pa lavaran, rak anat din eo deut Felipe GONZALEZ MARQUEZ, prezidant gouarnamant Bro-Spagn, penn-sekretour ar PSOE, da vezañ ur bourev.

Eveljust, n'eo ket e zaouarn a vourev, met daouarn tud all, dindan e urzhioù, paeet gantañ, ... daouarn emañ-ek kiriek d'ar pezh a reont.

Hervez ar Vonreizh (Con-

titudiön), emañ an Aotrou Gonzalez e penn ar gouarnamant hag e oberoù, e penn ar velestradurezh-stad, evel prezidant ar gouarnamant.

Neuze, mar bez bourevie-rezh dindan Felipe Gonzalez gant poliserien ha "guardia civil", eo Felipe Gonzalez eta a vo kaoz dreist-holl. Grevus eo an dra mar asant da seurt oberoù, ha grevusoc'h c'hoazh mar n'asant ket. Rak kablus e vo dre lez-ober, dre ma n'en do kemeret diarbenn ebet evit en em sidamall.

Ha boureviet e vez, anat eo d'an holl. Diskleriet eo bet kement-se d'ar varnerien, d'ar gazetennerien. Tud brudet-mat o deus anavezet ar fed-se.

Grevesoc'h zo c'hoazh : F. Gonzalez, nevez anvet e penn ar gouarnamant, a anzave didrabas ha kreñv, d'ar gazetenn EL PAIS, e virfe al lezenn "anti-terrorista", da larout eo al lezenn a ra un tamm-torch gant Breizh Bro-Spagn, hag, evel ma soñj da lod ac'hanomp, a brient, a aoz, a sikour ar boureviañ.

6 miz goude d'ar PSOE mont e penn ar galloud n'eus tamm gwarant-lezenn evit un den harzet da gaout skoazell un advokad.

6 miz eta, hep n'en dije ar PSOE fiñvet an disterañ (ha gantañ an niver brasañ er Gembr !) evit gwarantit en ul lezenn gwirioù kentañ mab-den diskleriet er Breizh.

Mezhusat tra ! Souezhet avat, n'omp ket !

Nebeud war-lerc'h trec'h ar PSOE e skriven (en EGIN) e rankemp gortoz an arnodenn-se da welout ha gwir e oa an nevezinti embannet, ha gouest e oa ar PSOE da ren ar gallowd politikel. An arnodenn-se, hini ar boureviañ, e lavaren n'hallfe ket ar PSOE tremen anezhi. N'hallfe ket ar PSOE echuiñ gant ar boureviañ, en tier-polis pe "guardia civil".

N'om ket laouen e vije bet ar gwir ganin. Rak ne oa ket gwall start bezañ gvelet sklaer. Ne oa cemet ober un tamm dezrann-renkad diwarbenn lec'h ar PSOE er stad spagnat.

An Aotrou F. Gonzalez n'en deus ket paouezet gant ur boureviañ. Deut eo eta da vezañ ur bourevier. N'halle ket bezañ disheñvel, gant ar frammoù en doa asantet dezho.

An Aotrou F. Gonzalez zo mergodenn an impalaerezh yanki hag ar c'hospital. Hag ar

mergodenned n'o devez ket a youl dezho o-un. Fiñval a reont, pa vezont laket d'ober, pa ziviz unan bennak o lakaat d'ober. An impalaerezh yanki, a c'hoanta tachennoù soudardel e Spagn, a garfe e chomfe ar Stad Spagnat en OTAN. Hag ar vergodenn Gonzalez gant e 202 kannad, a lez an tachennoù-se gant ar yankied, a zalc'h Spagn en OTAN, daoust d'e holl bromesaoù.

Larout a rae, m'hoc'h eus soñj, da Galvo Sotelo : "Ma c'hall ur brasañ niver er Gembr lakaat Spagn da vont en OTAN, unan all a c'hall e lakaat er maez".

Gwir a-walc'h. Dreist-holl ur brasniver klok evel e hini. Met ar brasañ-niver se n'eo ket trawalc'h. Arabat e vefe bezañ ur vergodenn. Hag evit a sell ar boureviañ eo heñvel. N'eo ket F. Gonzalez a zo o c'hoarn ar vourevien, int-i eo a zo ouzh e c'hoarn. An Aotrou F. Gonzalez n'eo nemet mergodenn an nazied-faskourien dreist-diraec-se er Stad Spagnat. N'eo nemet ur maskl ! Asantiñ a ra bezañ ar frammoù-stad-se. Sede an nevezinti. Felipe Gonzalez ar bourev, milliget ra vezo gant an holl wazed ha maouezet onest.

Milliget eo diwar vremañ.

Justo DE LA CUEVA ALONSO (EGIN- 17.04.1983-)

\*Hervez EL TIEMPO (niv.49, 18-24 a viz Ebril 1983), abaoe an 28 a viz Here, pa oa aet ar PSOE e-barzh, eo 160 darvoud boureviañ a zo da gontañ dindan gouarnamant an nevezinti. Al lezenn "anti-terroriste" a ro tu d'an arme ha d'ar polis mirout un den e-pad dek devezh hep gvelout alvokad ebet. Evit c'hoari gantañ eveljust. (En Norz I-werzhon eo 7 devezh).

M.K.

\*\*\*\*\*

. Prizonidi bolitikel zo e-leizh er vro-mañ. Hervez Herri Balasuna e oant 144 e 1979, 220 e 1980, 435 e 1981, ha 478 e 1982.

**SEIZH AVEL**  
ostaleri  
**KONFORT 22 PRAD**

## E BRO BARIZ

ar gwir-se ouzh ar "C'huzul-Meur" (Haute Autorité) ar Selled-ha-Kleved.

A-benn ar fin eo bet roet an asant da skignañ asamblez gant "FREQUENCE LIBRE" war 103,1 Mhz e Pariz, gant un dekred embannet an 29 a viz Mae 1983.

### BREMAN KAS AR RADIO EN-DRO

N'eo ket a-walc'h avat. Evit mirout an aotre eo dav sevel abadennoù en un doare ingal. Evit diskoulmañ ar c'hudennoù arc'hant ez eus bet savet ur gevredigezh "Radio-Pays-Technique" a breno an ardivinkoù hag a feurao anezho da Radio-Pays.

### PENNAOS SIKOUR AR RADIO

Tri zoare a zo da sikour ar radio :

1. Prenañ lodennoù (500,00 L. pep hini) e-barzh "Radio-Pays-Technique" evit prenañ an ardivinkoù (50.000 lur).
2. Prenañ madennoù 500,00 L. pep hini a vo restaolet gant ur c'hampi (interest).
3. Kas donezonoù.

Bez e c'heller ivez emzeleañ e-barzh "Radio-Pays" : 500,00 L. e koust evit ur gevredigezh ha 150,00 L. evit un den e-uman.

Evit kas ho skoazell pe gouzout hiroc'h e c'hellit skrivañ da : RADIO-PAYS, 6, place de la Madeleine -75008-Pariz - (Bro-C'hall). -

ROVERE  
**OTAN**  
VEUX UN PAYS VIVANT  
VEUX RESTER TOI-MÊME  
**FAISONS**  
**L'OCCITANIE AUTONOME**  
AUTONOMIA PER L'OCCITANIA!  
AUTONOMIA PER L'OCCITANIA!  
MIGUEL DE LEON  
PRESENTATION: CLARITA

BRO OKSITANIA - AN EMRENEREZH : D'ar sadorn 4 a viz Even e oa ur mil bennak a Okitaniz o vanifestiñ e Montpellier e vit goulenn ur statud evit o

yezh. Evel e Breizh amañ, e kave dezhe n'en doa ket ar gouarnamant dalc'het d'e bromesaoù kaer.

UR CER-STUR ENO IVEZ !

BREMAN NIVERENN 22-23

GOUERE-EOST 1983

## TAOLENN

LIZHIRI.....	2
MISS Mc DONALD.....	2
<b>STOURM</b>	
UN HANVEZHIAI STOURM.....	3
<b>STOURMOU</b>	
R.B.O. ALOUBET.....	4
DISENTERIEN EN TOULL.....	4
PERAK STOURM EVIT AN	
ADUNVANDIGEZH.....	5
DIWAN.....	5
<b>DESKADUREZH</b>	
BREZHONEG ER SKOL EVIT AN	
HOLL.....	6
BRO LEON, DOUAR AR BREZHONEG	6
<b>SINEMA</b>	
FESTIVAL DOUARNENEZ.....	7
<b>C'HOARIVA</b>	
KERNEVEZ CITY.....	8
<b>O.P.20</b>	
STOURM A-ENEP AN ARME.....	10
CHOM HEP OBER E GONJE.....	10
<b>BROIOU</b>	
RADIO PAYS BRO BARIZ.....	11
FELIPE GONZALES AR BOUREV..	11
OKITANIA.....	11
<b>BERR HA BERR</b>	
KELETER.....	12
KEMENNADENNOU.....	12

BREMAN-8, straed Hoche - 35000-ROAZON-  
 KOUMANANT EVIT 12 NIVERENN... :  
 96 LUR - SKOAZELL : ouzhpenn .

MAKETENN SAVET GANT : Lena LOUARN - Mard DUFFEL - Jil KIL Levere.

PENNADOU SAVET GANT : Herve Ar Beg, Mark Kerrain, Olier ar Mogn, Herve ar Bihan, Evgann, Jil Killevere, J.Michel Branellec, Tangi Louarn, Joel Donnat, strollad ar vro bagan

LUC'HSKEUDENNOU : Evgann, Lena Louarn, Oaled breizhek Pondi, Pascal Ne, Erwann Denez, CLO, Line Bourdier ha festival Wexford.

Renerez ar gazetenn : Silvi Donnat.

MOULET 1:1i Moulerezh al lisoù 13, straed ar Moneiz- ROAZON

An pennadik sinet ne enqouez-klont nemet ar re o deus xvel anezho.  
 C.C.P.A.P. 62974

Kazetenn di-klaret hervez lezenn, ha larnet SKOAZERENN anezhi. ISSN:0246 - 5264

**°KOUMANANT°**  
**BLOAZ**  
**12 Niv.**

**96 lur**

## RADIO ARVORIG

Jean-Pierre Pichard hag Herve Jaouen, paotred BAS a oa bep sul abaoe seizh vloaz oc'h ober war-dro an abadenn "La Musique des Bretons" war Radio-Arvorig, zo bet laret dezhe gant an Aotrou Hut-rener ar skingomz-se-e oa echu gant o abadenn.

An diviz-se zo bet kemeret e Pariz gant Radio-France, pa oant oc'h aozañ ar programoù-rannvro. An daou gomzer a lar int nec'het gant dazont sevenadur Breizh war ar skingomz, dreist-holl pa welont "n'eus mui a radio breizhek o skingnañ e Breizh a-bezh".

## FR3

Evel bep bloaz e vo ret adarre gortoz miz Gwengolo a-raok klevout brezhoneg d'an noz: echu gant teir abadenn sizhuniek Fañch Broudig "An Taol Lagad", d'ar Merc'her, Gwener ha Sadorn. Ar reoù galleg avat n'hoc'h eus ket da vezañ nec'het evito.

## BREIZH TREVADENNET

Piv a lar se ? N'eo ket U.D.B. met un dileuriad eus Kambor Rannvro ar C'henverzh ma kreder Marie-Christine Robert, kazetennerez "Le Monde" en ur pennad embannet d'ar 26 a viz Even diwezhañ.

D'ar lañ a viz Gouere 1983, (pouezusat devezh !), d'ar poent da gas ar gazetenn -mañ d'ar mouler, e oa ar P.S. o kejañ gant an Talbenn Sevenadurel (hag en ezel anezhañ), evit ar wech kentañ abaoe 1981.

## DILENNADEG RANNVRO

Gaston Deferre e-barzh "Le Monde" 10.06.1983

G.: Adalek an hañv 1981 ez eus bet laret hag adlaret e vefe an digreizennañ "afer vras seizh bloavezh-ren ar prezidant".

Daoust ha talvout a ra c'hoazh ar gerioù-se, daoust ha pouezus eo c'hoazh an digreizennañ ?

R.: Ya, ha tra-walc'h sel-lout ouzh roll-labour ar Parlamant evit gwelout... (...)

G.: Ha bez e vo dilennadegoù -rannvro e 1984, ma c'hallio votiñ an holl dilennerien ?

R.: N'eo ket ur gudenn gwall bouezus, hini an dilennadeg-se, nag hini dibab an doare da vouezhiañ ken nebeud all. Re a zilennadegoù a vez e Frañs, unan bep bloaz, ken e ya skuizh an dud, ken e chom ur bern hep votiñ...

Biskoazh kemend-all ! Pegoulz e vint graet neuze ? Un wech ma vo bet dilennet Chirac da Prezidant ar Republik ? Bevet an demokratelezh ha bevet ministr an "digreizennañ" !

## LEVRIOU

## LEVRIOU

## LEVRIOU



AN HERE

## KI BIHAN AR FEUNTEUN


Emañ AN HERE o tihan embann e levr kentañ evit ar vugale : "Ki bihan ar feunteun". Ar skrid anezhañ a zo bet kavet e-touesk testennoù bihan diwar dorn Anjela DUVALL. Treset ez eus bet skeudenoù kaer e gwenn ha du gant Silvi Donnat. Un arouez eo an tamm labour-mañ peogwir e oa bet skrivet gant ur varzhez brudet ken-ha-ken dre ar vro, ha pelloc'h c'hoazh.

Sed ha boulc'het e labour gant ar gevredigezh An Here, n'eus ket pell-bras zo e oa bet krouet gant skolaerien Diwan, rak dibaoe 6 vloaz bremañ e labour peupunan diouzh e du, ha ret mat pa ne oa netra graet. Mes n'haller ket delc'her gant ur seurt labour dispitet, pep hini en e gorn.

Emeur dija o kas klasoù kentañ derez en-dro ha tu-chañtik e vo staget gant an eil, tremen-mall eo sevel ar framm a-zoare da embann danvez-skol o vont a-feur gant an ezhommoù a zeuio war hent an deskadurezh, adalek an de-roù betek an dibenn.

A-benn miz Gwengolo e vo roet lañs d'ur gazetenn evit bugale ar c'hentañ derez. Ha michañs ho po tro da lenn e-barzh Bremañ keleier diwar he fenn. Ac'hann di e c'hallit goul titouroù ha kas ho kin-nigoù da Daniel An Doujet, 11, straed Alain Fournier, 56600 Lanester, hag evit prenañ "Ki bihan ar feunteun" (10 lur), skrivit da: An Here-Embannadurioù evit ar re yaouank- Ti-kêr Kemper- 29000-

JOEL.



Tostaat a ra e fri.  
 Ki bihan an dour  
 a dosta e hini ivez.  
 Emaint fri ouzh fri.

Gant USV (Unvaniezh Studieren Vreizh) e vo aozet un droiad war varc'h-houarn e kreiz-Breizh evit brezhonegerien (ur bloavezh-skol da vihanañ). Mont a raio an dud kuit eus Gwengamp d'ar Gwener 2 a viz Gwengolo hag echuet e vo d'ar Yaou 8 a viz Gwengolo e Plouared. An droiad-se ne gousto mann ebet nemet ar boued evel just. A-bep seurt traoù a zo bet prientet a-hed ar veaj. Evit kaout titouroù, skrivit da : Unvaniezh Studieren Vreizh 30, plasenn al lisoù- e Roazhon (35000).

Ur staj brezhoneg a vo aozet ar bloaz-mañ gant U.S.V. (Unvaniezh Studieren Vreizh) e Ti Kendalc'h. Ur sizhunvezh e pado ar staj : .adalek al Lun 15 betek ar Sul 21 a viz Eost 83. Daou live a vo : unan evit an deraouidi hag unan all evit ar re a oar dija un tamm brezhoneg. 500 lur e kousto d'ar stajidi gant ar boued hag al lojeiz. An enskrivadurioù a vez kemeret gant :

TI KENDALC'H- 56350 SANT VISANT S/OUST.

# GOUELIOU DIWAN

## FESTIVAL ROCK

KLEDER D'AR 7 A VIZ EOST

## NOZVEZH DIWAN

LANNILIS D'AR 15 A VIZ EOST

## FOAR AR PONEED

DESNEVEN - D'an 18 A VIZ GWENGOLLO 1983

-Adalek 14 eur 30 war blasenn ar Vali-Gozh

- . Poneed a-bep seurt gouenn da velout
  - . Juri bugale
  - . Pourmenadennoù gant kirri
  - . C'hoariva brezhonek war an dachenn gant "Strollad Ar Vro Bagan"
  - . Gourenadeg
  - . C'hoarioù giz Breizh
- Hag a-bep seurt standoù.

# KINNIGOU LABOUR

Emañ "OALED DIWAN" o klask monitourien tapet ganto ur skrid-testeni CAEV pe Bafa bag dre lien, barrek da labourat e brezhoneg evit ar staj a vo e TREGLOU :

.eus ar lañ betek an 13 a viz Eost.

Ar re zedennet gant ar staj-se a c'hell skrivañ da : OALED DIWAN- 29214 TREGLOU - pe :

☎16(98) 04.04.42.



Emañ "AN HERE" e klask un den a vehe e labour :

- . meraan stokoù (koustoù, gwerzh, marc'hadoù)
- . daremprediñ skolioù Breizh, an oll anezhe, al levraouegoù, C.R.D.P. hag all...
- . daremprediñ moulerien hag treserion
- . ober ar dro ur gazetenn evit ar vugale.

Mard oc'h dellennet get kement-mañ e c'hellit skrivañ pe bellgomz, da ouiet hirroc'h, da: DANIEL AN DOUJET-11, straed Alain Fournier-56600 LANESTER

☎16(97) 76.71.01.